

# GUERS

*Græt gant Per AR YAN, var eur  
Maleur arruet e Quemper Corantin,  
da Sul ar Baczion 1850.*

---

Var ton : *Pevar Den a barrès Pluffur.*

Deoc'h-u eta , Guerc'hes-Vari ,  
E teuan den n'em recommandi ;  
D'am Eal mad a dar Speret Santel ,  
Da rei dign sclerigen heb appel.

Ma tisclerjign e ber amser  
Ar maleur so erruet e Quemper :  
Quement a glevo e hana  
A dleffe e hoat donnet da yenia.

Clevet oc'heus comps a valeuriou  
Cals a dud drezeni ho deus souffret ar maro ;  
Mæs evel quent ar c'hruella poan  
E tevi e beo e creis an tan.

An autrou Sant Loranc benignet ,  
Hennes a ouffe deoc'h lavaret  
Pe-guen cruel eo ar poanniou  
Ho tevi e beo e creis ar flammou.

Deiz evit deiz da nôs sul ar  
A rema ha voa joaüs a galon ;  
Allas ! na songe hini a ne  
Evize hirroc'h an nôs evit o buez.

Prest goude an unecq eur  
E voa commancet ar maleur ,  
E maint ho tevi e creis an tan  
Quercouls ar bras evel ar bian.

Allas , ma bugale , emezi ,  
E creiz an tan red eo devi  
Hep na galloud en em souton  
Na caout sicour digant den.

Eur soudard e voa oc'h ober faccion  
 E quichen dor ar prison,  
 Ha pan devez guelet an tan goal  
 Eo bed commancet da gryal :

An hep so cousquet dihunet,  
 Car ar maleur so pisset :  
 Deomp da sicour ho souten ;  
 Mæs , allas ! ne deus quet ar voyen.

Pa voant eat e penn an ty  
 E clevont ar c'hlem hac ar c'hry  
 Gant ar vugale hac ar vamm  
 Ho tevi e creis an tañ flamm.

An tocqsin hac an taboulin  
 A sonne e Quemper Corentin  
 Da avertissa ar bomperyen,  
 Car ar maleur a zo cruel.

Dont a rezont bras ha bian,  
 En eur gryal : dan tan , dan tan.  
 Hini e bed na boultrone  
 Evit mont e danger he vues :

An escop hac ar veleyen,  
 Ar freret hac ar scoleryen,  
 Tuc'hentil ha payzantet  
 Tout e maïnt ho redet.

Ar soudardet , ar gard national,  
 Tout e redont a ractal  
 Ma vize moyen var boès sicour  
 E vize obtenet dezo recur.

Ar gendarmet , an arc'heryen pouliçz,  
 Ar c'hommiczer a rea liçz  
 Da zerc'hel dour dar bomperyen  
 Da dauler var neïn an doën.

Allas ! ma c'halon a vancq dign,  
 Va goat em goaziet a teu da frimi  
 Pa songean noc'h eus clevet netra  
 Evel ma lavarin deoc'h brema.

Pa glevas ar vamm e bugaligou  
 O crial e creis ar flammou,  
 A rea muyoc'h a boar dezi  
 Evit ma rea an tan eu e devi.

Credet hardiz va foanniou so bras ;  
 Ar c'heicq var va æsquern a so dija poas ,  
 Ha c'hoas e carfen am be da soufri  
 Poanniou va bugale gant va hini.

E map oaget a drivac'h vloas  
 Gant eur gouraich ar vrassa  
 En nem laosq dan traon eus an eil estach ;  
 Credit e hesquernigou a stracas.

Eur c'hostez anezan a voa grillet  
 Hac e galon a voa mantret ,  
 C'hoaz e save en e sao he-unan  
 En eur goulen : Pe-leac'h e ma va mamm.

Dan hospital e voa douguet  
 En trista stad ma alfoc'h da velet,  
 Un tu a nezan grillet gant an tan  
 Hac e galon mantret gant ar boan.

Diou verc'h e devoa ho servichi  
 Pa voa annoncet dezo ar malheur cri ,  
 Ma lavare an eil hac e ben anezo :  
 Me garfe e vent o vont en douar ganto.

A-dalecq an eür eus a vrema  
 Bedeg an eür diveza ,  
 Pa teuyo din sonch eus ho maro ,  
 Va daoulagad a ranco scuylha daëlou.

Ho æsqernigou a so dastumet  
 Nemed ar re so bed luduet ;  
 Lacqueat e zint ho fevar er memes bouet  
 Ha casset dar veret azambles.

Eur pobl dud a voa en ho enterramand ,  
 Qen bourc'hissyen qen paisand ;  
 Ho c'halonou tout a sesye  
 Hac an dour gant ho diou jodt a rede.

Me ho suppli , ô va Jesus !  
 D'ober outo eur sell truësus ;  
 Preservet a nezo eus tan ar purgatoar  
 Pa zint deved e beo var an douar.

An nep so bed qyriecq  
 Eus ar maleur a so digoët  
 A voa cousquet er marchosi  
 Pa zeuas an tan den difuni.

Sortyèt e bed e secret  
Pes a so caus ma se pun'isset,  
E lec'h beza dihunet tud an ty  
A ranc ober e-hunan e sorty.

Avoalc'h em beus deoc'h lavaret  
Evit ar plijadur o peus eus ma c'hlevet ;  
Monet a ran da finissa  
Dre eur maleur ar c'hruella.

Añ deiz varlerc'h , e parres Plomeur  
A so arruet ar memes maleur  
Gant un den privet a sclerigen ;  
Silaouit tout gytibunen.

Renan Caoudal en e vele  
A goeza an tan var e c'horre ,  
Hac evit songeal en em sicour  
E tiredas da doul an nor.

Allas ! an nor a voa alc'hoët  
Sortial er meas ne alle quet  
Bale e lec'h mar care dre an ty ,  
An tan a voa bepret eus en devi.

En toul an nor e ma bed couet  
Hac eno ezeo bed ebaret,  
Ha pavoä douf e se melezan  
E couësa e eñ an tu deoutan.

E æsqern a so bet destumet  
Nemed eur vrec'h dezan ne quet bed cavet ;  
Hounnes so bed luduet quicq hac æsqern ,  
Oh ! crissa maro eta , c'ristenien.

Cetu eur melezour aman ;  
Ma breur , ma c'hoar , sellomp ennan ,  
Da lâret eo , redoublomp hor pedennou  
Ma pellaï diouzomp ar goal blanedennou.

Quement a glevo ar guers-man  
A dleffe lavaret da neubeudtan  
Bep a bater ha bep a ave  
E delivrançz deus ho ene.

O va Jesus ! me o suppli ,  
Bezit eta truhez ouzomny :  
Recevet ac'hanomp en ho gloar  
Pa ezaïm quoit divar an douar.